

SILVESTRIC

411

66

I

AN TAD . . . Etre Chapel Sant Efflam ha tossen Mene-Bre
'Zo eun offiser iaouank ganthan eur pez kleze
'Zo eur c'habiten iaouank o sevel eun arme :
Me 'meuz eur mab, Silvestric, a lavar mont ive.

II

Siouaz ! Autrou kabiten, ne meuz mab nemethan
Ganen c'hui 'po 'r vadelez da lezel anezhan
AR c'HABITEN. — Ganeoc'h, denic ancien, me a zo souezet
Touchet en deuz an arc'hant ; d'an arme 'rank monet.

III

AN TAD . . . — Hast affo ! eonic bihan, nij 'trezec an arme
Evit gouzout hag ema Silvestric en bue
AL LABOUSIC . — Demad d'eoc'hui, Silvestric, demad a lavaran !
SILVESTRIC . . — Ha d'id ivez eon bihan, p'out deuet betec aman !

IV

Disken, va eonic bihan, disken var da zaou droad,
Ma scrivin d'id eul lizer da gass d'ar gær d'am Zad.
« Iac'h eo ho mab Silvestric ! a lavari d'ezhan
Ha gant joa e tistroio abars neubeut ama. »

V

AN TAD . . . Pa voan ebars em guele, em guele cousket mad
Me 'clevet Merc'hed Roudour o cana sôn va mab
Ha me 'trei ouz ar voger hag o commans voela
Autrou Doue ! Silvestric, pelec'h emaout brema ?

VI

*Pa voa an tad desolet oc'h ober he glemmou
Setu he vab, Silvestric, 'toul an or, o selaou*
SILVESTRIC . . — Ehanit, tad ankeniet, ehanit da lenva
Sellit ! Ho mab Silvestric a zo deuet ama !